

Son an Eur goz hag an Eur neve

429

War dôn : *Ar botou koat.*

LENNET

“ BREIZ ”

Bep Sun



Eur Zon ;

Eur « Bourd

ha Fars » ;

Eur Romant ;

Eur Pez-c'hoari

Istor Breiz ;

Labour-douar ;

Keleier ;

Marc'hajou ;

etc..., etc...

Da gentan, pa 'm oa klevet 'oa deut ar c'hiz
Da chench eur, diou wech ar blâ, evit kêriz,
E lâris en eur c'hoarzin : « M eus aon int trelatet ! »
Met gan ma Janed raktal, hola ! voen dislâret.

— Te ne gavez netra vat 'met an treo koz !
Met red eo d'it, ma den paour, kompren penôs,
Pegwir ve chenchet pep tra, an eur renk chench ive ;
Chom te 'ta gant da eur goz, me 'yei en eur neve !

— Kaer 'vo, 'mon-me, chench an eur, pez a gari,
An heol a zavo bepred d'e fantazi ;
Welan ket c'hoaz an dra-ze 'c'h ober ken bras burzud ;
Da yer, sell, nan efont ket tamm abretoc'h d'o c'hud !

— Arsa, emei, droug enni, te 'zo kloukez !
Bremen 'barz en renk ar yer en em lakez ?
P'o deus spered en o fenn, an dud a renk, marvat,
Hen lakaat 'barz en impli da wellaat o zamm stad !

— Dre benôs 'ta 'n em gavi ken evurus,
War digare vo sonet an anjelus,
Vo sonet an anjelus d'unnek eur 'lec'h kreizte,
Ha gwelloc'h vo 'r patatez debret d'an eur neve ?

— Kaer 'tevo goapaat, emei, hag ober fent.
Ar wirione 'zo ganin, oh ! ya 'velkent !
Me az tefi da lâret penôs n'eo ket gwir ze :
En peb amzer, d'an treo koz, 'vo trec'h an-treo neve !

Setu me bourdet ganti ha bourdet mat.....
Aboue, me lâr d'ec'h n'eo ket gwell vrao ma stad ;
Kaset e ven da stoupa, ha ma eur goz ha me ;
N'ouzon ket ha me 'c'hallow pad barz eur sort buhe.

Arsa, daoust ha ne oa ket digareou
Trawalc'h evit lakaat trouz er menajou,
Ma oa red c'hoaz invanti eun digare ouspenn ?
Met heman eo ar gwasan, a rei d'in koll ma fenn !

Bep beure, gant ma Janed ven dihunet,
— Hast buan sevel, Pipi ! N'an ouzout ket
Eo pemp eur neve sonet ha te c'hoaz 'nez kwele ?
— Pemp eur ? Oh ! ya da, pe sukr !... Hag-en n'eo ket c'hoaz de !

N'eo ket hepken 'n eur zavel, met betek noz,
Ha da beb eur, koulz lâret, ve bec'h ha kroz ;
Pez ve abred evidon, 'viti 've diweat ;
Ne ve ket debret eur pred hep hon daou 'n em chakat.

Ar zul, devez a ziskwiz, 'zo deut, siouaz,
Da vean 'vidon devez an drubuilh vras ;
Eur goz, eur neve, o diou 'n em fenn en em veskont,
Seul-vui fell d'in 'n em gaout, gwazoc'h kollan ma c'hont.

Gwech, ec'h arruan er bourk 'benn an eil zôn,
Gwech all ve 'n ôtrou person 'c'h ober e brôn :
Dislipet penn ma c'hudenn, n'on ken 'vit hen tapout,
Eur goz koulz hag eur neve, dallet on gante tout.

.....
Ma den mat, mar ec'h eus c'hoant kêr peuc'h 'n ho ti,
Laket 'ta hoc'h orolaj gant he hini ;
Ma lavar d'ec'h ho Janed 'fell d'ei an eur neve,
Ma fe, asantet ganti, pe ho po keun goude.

Troet, Ma Plij !

“ BREIZ ”

a goust

4 skoed ar blâ



Kas eur

Mandat Chèque

Postal

(Rennes 13.851)

da :

Administration

“ BREIZ ”

15, Rue des

Capucins

- *GUINGAMP* -

Troet, Ma Plij !